

Canaouen

Var sujet ur plac'h a zarmonas en Log'ivi - Plougras,
goude Pasq, er bla 1799 ;

(412, suite)

Var un ton gai .

Selaouit oll, Citoyanet,
An nebeut rimou compozet,
Hag a rayo d'e'h goelet sel'êr
E vec'h alies tapet ber.

(413)

An neb a ra atansion,
A vel tourmantet o c'halon,
Rac a rit argumanchou
Erit souten oc'h ereurion :

Ar vech-ma e vo dissipet
Oll devalijen ho speret ;
Eur brofetes e Log'ivi
A zo deut d'o sclerijenni .

Credi ra calz eo inspiret
Gant Doue, da zont da brezec
Ha da espliga al lezen
G'ir erit g'ir d'e'h, citoyen.

En pel commun, en pel canton
Emân ar brud eus e zermou
Ar velenen voa on trompe ;
Demp da glêvet ar virione .

(414)

Cals a dud fur, choui an entent,
En em brepar da vont en hent :
An eil a angach eg'ile,
Darb'et e voe din mont ive.

Mes aroc en em desida,

Eo mad en em sclêrijenna;
 Hag e ris va zouch ber-a-ber,
 E voa quelloc'h din chom er g'er.

Ar Scritur pa meus consultet,
 Comzoù Sant Pol ameus caret:
 « Merc'het, emean, en Templon,
 „Tanit ha servit ho qinou.»

(415)

Setu arze 'r reflexion
 Am dihouas eus ar sarmon;
 Rac biscoas n'en deo bet fontet
 Ar fe dre sarmonion merc'het.

Mès, elêc'h chom da rêzoni,
 E reder tout da Log'iri:
 Cals a draou a velomp chenchet;
 Perac ar Scritur na ve get?

Setu arze eur rêzon all;
 Na gredân get er c'hafac'h fall:
 Rac bet e deus ar breferans
 Digant ar bobl en asurans.

En Montroulez, en Foar-an-Nec'h,
 E'h aru tud eus a beb lec'h,
 Ne ve get brasoc'h foul enni
 Erit a voa en Log'iri.

(416)

Pa velen ar Plac'h o tostet,
 E crier tout: Vivat! Vivat!!...
 Neget g'evier a gontet d'emp,
 Eman serten Doue ganemp.

Pignat a ra 'r Plac'h er gador,
 An dud zo o qinou digor;
 Hag ar Verc'hez a gle disgen
 Da arza en e c'hichen.

Mès, allas! caer a zo gortos,
 Ar Verc'hez en en a repos;

Ne zisqenno get ac'hane
Da zouten ar zarmen neve.

Ar Vaouez a ra sin ar groas,
Er sin-se e devoa sonch c'hoas;
Ha goude bea bransellet,
E deus er g'iz-mañ parlantet:

« Yunit, pedit, roit forz arc'hant
» D'an nep o deus grêt ar sermant;
» Hag erit crêvat al lezenn,
» E zai merchet da velezen. »

(417)

Ne deus get grêt nemeur a vuod;
Eur g'iz a bronons bep minut:
Var e c'homzou reglit o fe,
Disul e sarmono are.

Ar Plac'h qez, mar boa inspiret,
A zo serten en em dromplet:
Na grede get en e c'halon
E voa grêd e flas er prizon.

Serten, tud zo hag a avans
Ez eus nao evelti en Frans;
Ne lavar erzeus oupen cant,
Prouvet-clos eo va argument.

(418)

Eur plac'h fur e devije tor
Mont erit arc'hant er gador;
An nep zo bet eus e c'hêvet
Zo gercouls hag hi trelatet.

Esop a gomz eus eur mene
A voa en prouan a rugale;
An dud a rede o clêvet
Un neventi estranch meurbet.

Credi rejont incontinant
E c'hanje mene eur jecant;
Mêz trompet e voe o c'hreden;

G'enel a ras eul logoden.

(419)

Setu ar pey a aruas
Er bourg a Log'ivi - Plougras :
E sonch quelet eur profetiz,
E veler eur plac'h diodet.

Retorn a ra 'r pelerinet,
Ar vez var o bizach skrivet.
Pa gomzer a Blac'h Log'ivi,
Na reont pelloc'h nemet mudi.

Allas ! ne zeus get a zouetans
Na vo collet ar fe en Frans,
Mar deu an dud da ajouti
Creden da bep sort soton.

Me meus aon ma ve anonset
E ve un Doue neve grêt,
Eus, sioas, cals hag er c'hrete,
Qen estranch eo o dallentiz.

(420)

Bremân eus eun nebeut amzer,
Pa voa brassa tout ar vizer,
En devoa darn credet gant joa,
E rize bet daou lost ar bla.

Alies e voar bet trompet,
Evel gent na fureer get ;
Me a zezir, gant cals a joa,
Ve oman ar vech diverza.

Cals a zotizou zo bet grêt
En amzer ar Jacobinet ;
Bremân on eus consolation
E rên ervus Napoleon.